


8N2-2-031

KANTIKOU HA PEDENNOU

EN HENOR

ZANTEZ BARBON

ar Faouet.



SANTEZ BARBON
pedi. evidomp.



Handwritten scribbles and lines, possibly a signature or initials.

Handwritten numbers: 2188

Kemper, moullit e ti de Kerangal.

Ton
ar verz
koz.

San - tez Bar - bon hor pa - tro - nez

Pli-jet ga-noc'h 'nho ma - de - lez Pe-di e -

vi - domp Hor Zal - ver M'hon di - oual -

lo e pep dan - jer.

Ton
santez
Noaluen

E-nor doc'h, San-tez Bar-bon, O Guer-

c'hez ha Mer-ze-rez; Ni ho kar a wir ga - lon;

zellit ou-zomp gant tru - ez. Sa-lud! Sa-lud

d'ho cha-pel Ken koant e-mesk ar rei - er,

E-vel eun neiz tur-zu-nel, Dreist ar stan-ken

hag ar ster.

KANTIKOU HA PEDENNOU DA ZANTEZ BARBON

I Kantikou.

1. KANTIK EN HENOR D'AR ZANTEZ

Var don ar verz koz.

1. Guerc'hez ha mezerez santel,
Ni 'zeu da c'houlen ho skoazel;
Ezom hon euz, e peb mare,
Euz ho skoazel dirag Doue.

DISKAN :

*Santez Barbon, hor patronez,
Plijet ganoc'h 'n ho madelez,
Pedi evidomp Hor Zalver,
M'hon diuallo e peb danjer.*

2. Aliez hon euz merit
Bout oll gant Doue kastlet;
Deut d'hor miret diouz ar poaniou
A denn varnomp hor pec'hejou.
3. 'Kreiz an arneu, pa-z-omp spontet
Gant ar gurin hag al luied,
Buhan varnomp plijet asten
Ho torn gallouduz d'hon difen.
4. P'e guir ho kalloud a zo braz,
Eur goulen all a rafomp c'hoaz:
Miret an dud hag ho madou
Diouz an tan goall hag he reuziou.

5. Santez Barbon, plijet ganoc'h
Hon diouall diouz eun droug brassoc'h,
Diouz an tan skrijuz zo c'houezet
En ifern 'vit an dud daonet.
6. Ho pedi a reomp c'hoaz ouzpenn
Da ziuall ar vicherourien ;
P'ho deuz labouriou danjeruz,
Bezit outhe trugarezuz.
7. Diouz toliou ar maro treitour
Miret anhe 'kreiz ho labour.
Varnhe plijet beilla bepred
Evit n'ho devo drouk ebet.
8. Pa vo tostik fin hon amzer
Gouennit digant Hor Zalver
Ma vimp maget, arog mervel,
Gant he gorf hag he voad santel.

J. B.

2. KANTIK ALL DA ZANTEZ BARBON

Var don : *Rumengol* (1).

1. Santez Barbon 'zo, en hor bro,
Anaet ha karet a bell zo ;
En he heñor, feiz hon tadou
A zavas kalz a chapelion.

DISKAN :

*Santez Barbon, deut d'hon diouall
Diouz ar gurun hag an tan goall,
Ha pedit ma helfomp ive,
Kent mervel, reseô hon Doue.*

(1) Pajen 13.

2. E renk he chapelion kaera
Hani 'r Faouet eo ar genta ;
Savet huel uz d'an draonien
Na hi zo koantik ha laouen !
3. Gant pebez dudi he c'haver
Kuzet e plegou ar reier !
Hi 'neuz ouzpenn pevar c'hant vla...
Chomet eo iaouank memez tra.
4. Ar chapel-ma zo bet savet,
(Var zouar Baron ar Faouet)
Gant eun dijentil euz ar vro,
Oa Yan Toulbodou he hano.
5. Eur bobl heb niver 'zeu bep bla
Beteg aman da bardona
Pelerined a dost, a bell,
Gant feiz a zired d'hor chapel.
6. Lod a zeu da drugarekât
Ar zantez bet outhe ken mad ;
Lod all a zeu evit goulen
Ma plijo ganthi ho difen.
7. Pedomp ar verzerez santel
Hirio, da dol varnomp euz zell,
Pedomp anehi gant guir fianz
Evit an Iliz ha bro Franz.
8. Goulenomp evit Breiz Izel
Ma vo d'ar feiz bepred fidel ;
Pa n'ez ket feiz 'barz ar galon,
N'heller ket bout eur guir Vreton.
9. En de-man, a greiz hor c'halon,
Meulomp, meulomp, Santez Barbon ;
Gloar dehi dre holl er bed kristen,
Ha gloar en envou da viken !

J. B.

3. GUERZ NEVE SANTEZ BARBON

Var don : *Evit beva gant levez.*
(Toniou Kemper n^o 58.)

1. Ar zantez aman henoret
Euz kerent païen oa ganet ;
He zad zoken a oa, siouaz !
D'ar gristenien enebour braz (1).

DISKAN :

*Santez Barbon, digant Doue,
Plijet goulen d'ho pugale
Ar c'hrass, en eur heuill ho skoueriou,
Da vale var hent an envou.*

2. Dre eur c'hrass presinz meurbed,
Hi resevas ar feiz abred ;
Ac'houdevez var an douar
Ne glask 'met Doue hag he c'hloar.
3. Abretoc'h c'hoaz eo bet deomp-ni
Gant Doue roët ar guir fei ;
Holl e rankomp bout anaoudek
Evit eur c'hrass ken talvoudek.
4. Dre urz he zad 'n eun tour huel
Ar zantez a oue dalc'het pell.
Eno, distag ouz traou ar bed,
Gant Doue hi 'gomze bepred.
5. Da zimezi, eur vech en oad,
Barbon zo poulzet gant he zad.
Respont a ra bevech a-grenn
E chomo guerc'hez da viken.

(1) Dioskor oa hano he zad. Heman oa eun den pinvidik braz, mes d'an idolou siouaz ! hèn doa roet he galon.

6. An tad koulskoude a esper
E chancho sonj gant an amzer ;
Da c'hortoz, e teu d'he lezel,
'Vit mont da velet broiou pell.
7. Neuze, Barbon ebarz an tour
'Ro urz d'ober eun tamm labour :
Tri brenestr, elec'h daou, zo graet,
Evit henori an Drinded (1).
8. Euruz an ene zo fidel
D'henori an Drinded santel ;
'Vel ar zantez, eo sur ive
Da gaout bemde grassou neve.
9. Pa zistro Dioskor d'ar gær.
Dronk braz ouz Barbon e kemer,
Ha klask a ra dioc'htu neuze
He laza gant eun tol kleze.
10. Mes Doue leun a vadelez
A vir he bue d'ar verc'h kez.
Eur garrek raktal digoret
A losk ganthi plass da dec'het.
11. He zad he c'hav, nebeud goude,
'N eul lec'h distro, var ar mene,
Hag eno, kerkent, e krogas
Da skoi ganthi a doliou baz.
12. Siouaz ! he gounar a ia keit
Ma flastr he verc'h dindan he dreid ;
He stleja 'ra zoken ivez
Dre 'r bleo e lec'hiou digompez.
13. He stleja 'ra, hen he-unan,
Beteg ar gouarner Marsian,
Evit ma vo gant an tyrant
Laket da nac'h he badiant.

(1) Evit digass da zonj euz an akt-se a zevosion eo e ve merket tri brenestr braz e tour ar zantez.

14. Græt a zo dehi gouzanv neuze
Tourmanchou kri ha didrue ;
Més, kaer vo dispenn he c'horf kez,
Renons d'he feiz ne rai jamez.
15. Dispennet eo he holl mempron ;
Laket zo tan var he c'hostou ;
He diou vron memez zo troc'het
Ha 'benn ar fin eo dibennet.
16. He zad he-unan (goassa tra !)
Zo kri avoalc'h d'he dibenna ;
Mes, dioc'htu varlerc'h he dorfed,
Gant eun tarz karun oue lahet.
17. Bout zo kerent breman ive
Gwir vuntrerien d'ho bugale.
Sionaz ! sionaz ! dre wal skoueriou
E ve lahet kalz eneo !
18. Santez Barbon, dre ho peden,
Sikourit ar gerent kristen
Da zével mad ho bugale,
Dre skoueriou santel ho bue.

J. B.

4. GALV D'AR BARDONERIEIEN

Var don : Santez Noaluen (1).

DISKAN :

*Enor doc'h, Santez Barbon,
O Guerc'hez ha merzerez !
Ni ho kar a wir galon,
Zellit ouzomp gant truez.*

(1) Var an eil pajen euz ar golo.

1. Salud ! salud d'ho chapel
Ken koant e-mesk ar reier,
Evel eun neiz turzunel
Dreist ar stanken hag ar ster !
2. Aze hi gloestraz guechall
An Autrou Yan Toulbodou
Ho poa miret didammal
E-kreiz freuz ar gurunou.
3. A c'houde pevar c'hant vloa,
Nag a dud a vandennou
A zo deut d'he bizita,
Pa ve deiz ar pardonioù !
4. Oh ! na piou laro niver
Ar re ho peuz zikouret,
E-kreiz darvoud pe danjer,
P'o deuz doc'h 'n em erbedet.
5. Ho tiouvrec'h bepred digor,
Ho kalon leun a drue,
C'hui zigemer tud-Arvor
'Vel eur vam he bugale.
6. Pa c'halv ho kloc'h d'ar menez
Paour, pinvik, bourc'hiz, mesiad,
Koz, iaouank gant levenez
D'ho kwelet 'weler tosiat.
7. 'Leiz an henchou e teuont
Euz an dro hag euz a bell,
Dirag-hoc'h e taoulinont
Hag holl e kavont skoazel.
8. Rak ni holl, Santez Barbon,
Ni fiz enoc'h d'hon difen ;
C'hui zo dalc'hmad hon itron
Er joasted pe 'n anken.

F. M.

5. KANTIK DA ZANT MIKEL

Var don : *Nous voulons Dieu.*

DISKAN :

*O Sant Mikel beniget,
Ni c'houlen ho skoazel ;
Totit eur sell var hor bro garet ; } bis
Sikourit an Iliz santel.*

1. Pa gredas Lusifer 'n em zevel
Enep Doue, e lein an Ee,
Sant Mikel, gant an Elez fidel,
A zifennas guirion Doue.
2. Pa oue laret ar c'homzou heuzuz :
« *Non serviam !* Na blegin ket ! »
Kerkent oue klevet : « *Quis ut Deus ?* »
Par da Zoue n'eus den ebet ! »
3. Raktal ive an El gallouduz
A strink an diaoulou var ho fenn
Beteg donder an ifern spontuz,
En tan a zevo da viken.
4. Na kaer eo gulet prins an Ele
Guisket evel eur brezellour !
He zorn nerzuz a zoug eur c'hleze ;
He droad a flastr an enebour !
5. Hirio, siouaz ! an drouk sperejou
Eo evel toret ho chaden.
O Sant Mikel, deuz lein an envou,
En ho enep deut d'hon difen.
6. Goulennit evit ar vugale
Ma vint sentuz ha fur bepred ;
Diouallit ar yaouankiz ive
A enep skoueriou fall ar bed.

7. Beillit ouspenn, o Arc'heil santel,
Var oll zoudarded hon arme,
Ma vint d'ho dever bepred fidel,
Tud direbech e peb doare.
8. Holl hon euz ezom euz ho sikour,
Rag brezel a zo heb ehan ;
Hon diouallit diouz an enebour,
Dreist holl da heur hon tremenvan.

J. B.

II

Pedennou da Zantez Barbon.

1. Peden an Iliz, da zevez he gouel.

Dre beden Santez Barbon, guerc'hez ha merzerez,
plijet ganoc'h, o ma Doue, hon diouall deuz peb
drouk. Selaouit ar pedennou mad a ra evidomp ar
zantez ; dreizhe greit deomp, arog devez hor maro,
reseo korf ha goad santel Hor Zalver Jezuz Krist e
Sakramant an Auter, goude bout en em breparet dre
eur guir binijen hag eur goession vad.

2. Peden all da Zantez Barbon. evit kaout eur maro mad.

Ma Doue, choazet ho peuz Santez Barbon evit kon-
soli an dud a-bed ho bue ha var ho zremenvan ; roit
deomp, dre nerz he fedennou, ar c'harrass da veza
bepred en ho karante divin, hag ar c'harrass ive da
lakat hor fianz e meritou Passion ken poanuz ho
Mab. Hor miret evelse da vout surprenet gant ar
maro e stad a bec'hed. Eur vech ma vimp kennerzet
gant ho sakramanchou : gant ar Binijen, Sakramant
an Auter hag an Nouen, greit deomp bale dispoñt.

varzu ar gloar a bado da viken. Her goulen a reomp a greiz kalon dre ar memez Jezuz Hor Zalver. Evelse bezet græt. (100 devez Indulg. eur vech bemde, evi-domp hon unan, pe evit an Anaon.)

3. Meulodi Santez Barbon (1).

O ma Doue, o pegen braz eo ho madelez hag ho trugare ! Laket ho peuz da bara var ene Santez Barbon guir sklerijen ar feiz ; græt ho peuz debi dispri-jout ar bed hag he henoriou kaera, ha meritout dre-ze bout unanet ganoc'h. Skeduz eo bet ar Zantez, evel eur bod lili etouez ar spern : Henvel eo bet ouz eur c'houlouen o para e kreiz an denvalijen. *Alle-luia !* Meulodi da Zoue !

4. Peden all en honor d'ar Zantez (2).

O Barbon, guerc'hez fidel, dont a reomp da unani hor moneziou dister gant mouez an Iliz ha da ginnig deoc'h var eun dro hor meulodiou hag hor pedennou.

Pedit, o Merzerez beniget, evit ma lugerno muioc'h-mui, etouez an dud, sklerijen ar feiz var mystar an Drinded Santel. Lakit Satan, hon enebour, da zantout an dismeganz o kouea var he benn, pa glevo pep den o veuli sklerijen an Drinded, ar sklerijen-ze merket dre an tri brenestr a fellas deoc'h kaout en ho tour.

Guerc'hez ha Merzerez beniget, ho pet sonj'eo plijet gant Doue lakât etre ho taouarn eur galloud burz-duz : n'e ket ar galloud da strinka ar gurun var an douar, mes er c'hontrol d'hen distroi divar an dud.

Kemerit hon armeou dindan ho skoazel ha mirit ouz tan ar brezel da noazout d'hor zoudarded ha d'hor martoloded. Dionalit ive, ni ho ped, ar re holl a c'hell bout e danjer, dre ma reont implij euz ar poultr en

(1) *L'Année liturgique*, par Dom Guéranger. T. I, 4 Déc.

(2) Græt hervez eur beden savet e gallek gant ar ma-nac'h brudet Dom Guéranger.

ho labourou (1). Selaouit ar pedennou a zav varzu ennoc'h euz kalon an dud zo spontet gant an arneou, pe ar re a labour diouz ho micher dindan an douar. Plijet ganoc'h ho dionall hag hon diouall hon unan diouz ar maro subit. Evelse bezet græt.

Les mêmes Prières en français.

1. Prière de l'Eglise, en la fête de Sainte Barbe.

Nous vous en prions, Seigneur, faites que l'intercession de Sainte Barbe, Vierge et Martyre, nous préserve de tout malheur. Ayant égard à sa médiation, faites qu'au moyen d'une vraie pénitence et d'une sincère confession nous méritions de recevoir, avant notre mort, l'auguste Sacrement du corps et du sang très saints de N.-S. J.-C., qui vit et règne avec vous dans les siècles des siècles. Ainsi soit-il.

2. Prière pour obtenir une bonne mort.

Seigneur, qui avez choisi Sainte Barbe pour consoler les vivants et les agonisants, accordez-nous, par son intercession, de vivre toujours dans votre divin amour et de mettre notre confiance dans les mérites de la douloureuse Passion de votre Fils, afin que la mort du péché ne nous surprenne jamais, mais que, fortifiés par les saints sacrements de la Pénitence, de l'Eucharistie et de l'Extrême-Onction, nous puissions marcher sans crainte vers la gloire éternelle. Nous vous en supplions par le même J.-C. Notre-Seigneur. Ainsi soit-il. (Indulg. de 100 jours. Applic.)

(1) Santez Barbon zo bet choazet da batronez gant ar re a labour da ober pe da veraj ar poultr. Ar zantez eo patronez ar « boudrierien », sôudardet an « artillerie » hag ar vengleuerien.

3. Antienne en l'honneur de Sainte Barbe.

O miséricorde immense de la divine bonté, qui a glorifié Sainte Barbe par la splendeur de la seule véritable lumière et l'a rendue digne de s'unir à la divinité, après qu'elle eut méprisé les honneurs de la terre ! Elle a brillé comme un lis entre les épines ; elle a lui comme la lumière dans les ténèbres. Alleluia.

4. Autre prière en son honneur (1).

O Sainte Barbe, Vierge fidèle, nous venons joindre nos faibles voix à celle de l'Eglise et vous offrir à la fois nos louanges et nos prières.

Priez, ô bienheureuse Martyre, afin que la foi au mystère de la Sainte Trinité brille parmi les hommes d'un éclat toujours croissant. Faites que Satan, notre ennemi, se sente couvert de confusion, lorsqu'il entendra toute langue acclamer la lumière de la Trinité sainte, la triple lumière figurée par les trois ouvertures que vous files pratiquer dans votre tour.

Souvenez-vous, ô Vierge et Martyre bénie, que Dieu a daigné remettre en vos mains un pouvoir merveilleux : ce n'est point le pouvoir de lancer la foudre, mais de la détourner de nos têtes.

Prenez nos armées sous votre protection et préservez des feux de la guerre nos soldats et nos marins. Daignez aussi, nous vous en supplions, couvrir de votre protection tous ceux qui, dans leur travail, ont à redouter les explosions de la poudre. Daignez les préserver tous et nous préserver nous-mêmes de la mort subite. Ainsi soit-il.


(1) Formule imitée de Dom Guéranger, dans son *Année liturgique*.

Kemper, moulet e ti de Kerangal.

Ton Rumengol.



Santez Bar- bon zo, en hor bro, A-naet ha



ka-ret a bell zo ; En he he - nor, feiz hon ta-




dou A za-vas kalz a cha-pe-liou.


DISKAN



San-tez Bar-bon, dent d'hon dioual Diouz ar gu-



run, diouz an tan-goall, Ha pedit ma hel-fomp i-



ve, Kent mer-vel, re-seo hon Dou - e.

Imprimatur :

Quimper, le 17 Juin 1911.

A. COGNEAU,
Vic. gén.